

8N3-3-021

# CANTICOU SPIRITUEL

EVID

AR MISSIONOU, AR RETREJOU, ETC


APPROUVET

GAND AOTROUNEZ ANN ESKIBIEN

A GHEMPER HAG A ZANT-BRHEC.

(PROPRIETE.)

— NOUVELLE EDITION. —



LANTREGER

E. TI. AR. FLEM, Imprimerie de L. L. L.

1868.

Nous Evêque de Saint-Brieuc,

Après nous être assuré que le recueil de cantiques intitulé : *Canticou spirituel evid ar Missionou, ar Re-rejou, etc.*, ne contient rien que de très-édifiant et de conforme à la foi catholique, avons permis et permettons de l'imprimer.

Saint-Brieuc, le 10 juin 1854.

† J.-J. PIERRE.

*Evêque de Saint-Brieuc et Tréguier.*

Dre autorite un Autrou'n Escop a Guerne hag a Leon, ez eo permetet imprima al levri bihan-ma, leun a zantiman-chou a feiz hag a zevosion.

E Quemper ar 17 a vis cost bloas 1855.

SAUVEUR, vic. gén.

# CANTICOU SPIRITUEL

EVID

AR MISSIONOU, AR RETREJOU, etc.

ARAOG AR ZARMON, AR GONFERANS, etc.

Ton : *Venez, Venez.*

Spered-Santel, Spered a sklerijen,  
Plijit gan-hoc'h enn-omp bréma diskenn  
A sklerijen karghit hor sperejou,  
A garantez tommit hor c'halonou.  
Ann Ebestel enn eur sâl-assamblet  
A dan ho krag-hoc'h euz bet holl karghet;  
Bet evid-omp ar memez madelez,  
Ne d-omp hep-z-hoc'h nemet sempladurez.  
Gwerc'hez Vari, esperans ar pec'her,  
Pedit Jezuz, ho Map hag hor Salver :  
Grit d'hor spered komprenn komzou Doue,  
Ha d'hor c'halon ho miret goude-ze.

ENN OFEREN. — D'AR GORREOU.

Ton : *O Halon Sakr.*

Me ho salud, Korf ma Salver,  
So diskennet war ann Aoter;  
Enn-hoc'h ar bara zo chenchet,  
Ha gan-hoc'h e vezinn maghet.

M'ho salud ivez, Goad divin  
So er c'halir-e leac'h ar gwin;  
C'houi evid-oun zo bet skuillet,  
Deut d'am goalc'hi a bep pec'het.

MEMEZ TRA.

Ton : *Mou doux Jésus.*

Diskan.

\* Parce, Domine, parce populo tuo.

\* Ne in cœternum irascaris nobis.

O ma Jezuz, chetu deut ann amzer  
Da bardouni da c'hlac'har ar pec'her;  
Nan, biken mui, bug'hel divad  
Ne doullinn dre ar pec'het  
Kalon ma Zad.

\* Parce, Domine... \*

D'hoeh, ma Jezuz, pa'z gounn koustet ken ker,  
Dre ho maro pa'z oc'h bet ma Salver,  
Na lezit ket ar weach-ma c'hoaz  
Da vont da goll ar gounid  
Evezuz ho-kroaz.

\* Parce, Domine...

Gwir vap prodig, ama war ma daoulin,  
M'ho ped, Jezuz, ho pet truez ouz-in;  
Gant ma daeron ha gant ho koad  
Ma goalc'hit, ma azgoalc'hit,  
Oan dous ha mad.

\* Parce Domine...

EVID AR VENEDICTIION.

Ton : *Venez, Venez.*

Adoromp holl e Sacramant ann Aoter  
Gwir Vap Doue, Jezuz hon Mestr, hon Salver;  
Sperejou evuruz, prined euz he balès,  
Adorit-hen gan-é-omp, meulit-hen da jamès,  
Meulit-hen da jamès.

Dre drugarez evid-omp-ni incarnet,  
Dre garantez enn hosti ez oc'h kuzet :  
Deut eta, ma Jezuz, euz ann Aoter ho trôn,  
Da rei d'é-omp holl brema ho penediction,  
Ho penediction.

MEMEZ TRA.

Ton: *Adeste, fideles.*

Christenieñ, pobl eüruz, bugale da Jezuz,  
Deut, adoromp hon Tad karantezuz :

Hen eo hon Roue ha Roue ann Elez ;

Adoromp-hen a galon *(bis)*

Adoromp-hen gant gwir devotion.

O pebez karantez hoc'h euz, Salver ar bed,

Da chom gan-omp enn hosti consecret !

Dont a rit bemdez 'vit mezur hon ene :

Ni hoc'h ador a galon *(bis)*

Ni hoc'h ador gant gwir devotion.

Stouet holl d'ann douar dirag ho majeste,

Ni hoc'h ador, Jezuz, gwir Vap Doue :

Roit d'e-omp, ni ho ped, ho benediction :

Ni hoc'h ador a galon *(bis)*

Ni hoc'h-ador gant gwir devotion.

VAR AR FEIZ.

Ton: *Eun Doue hepken.*

Doue en devez ma c'hrouet,

'Vit he anaout, he garet.

He servicha mad er bed-man ;

Ha mont eunn deiz d'ann env gant-han.

DISKAN.

Credi a rann, ô ma Doue

A galon hag e gwirione,

Ar pezh hoc'h euz d'e-omp revelet,

Ha dre ann Iliz diskleriet.

Me a gred eunn Doue hepken

A zo a viskoaz, da viken,

Eur spered pur hag holl parfet

En deuz a netra great ar bed.

Tri Ferson a zo enn Doue,

Disting ann eil euz eghile :

Ann Tad, ar Map, ar Spered-Glan,

Parfet ha Doue peb-unan.

Ar Map evit dont d'heñ prena

So bet concevet er bed-ma ;

Dre vertuz ar Speret-Santel,

Hervez komz ann El Gabriel.

Gant Mari, he Vamm bennighet,

He Vamm hag hi Gwerc'hez bepred,

Eo ganet enn eur c'hraou dister

Er goan hag er brassa mizer.

Tremenet en deuz he vuez,

Ebarz ar boan, ar baourentez,

O-tiskouéz d'e-omp eo dre boaniou

E renkomp gounid ann Eavou.

Evit ar bed holl war ar groaz  
E sacrificz en em offraz;  
Teir heur er groaz eo bet staghet,  
Ha beteg ar maro poaniet.

He gorf a oe sebeliet,  
Hag he ene dispartiet  
A ziskennaz enn iferniou  
Da zilivra ann eneoù.

Tri devez goude ma varvaz  
Leun a c'hloar e resuscitaz;  
Hag enn envou eo bet pignet  
Enn tu deou d'he Dad azezet.

Ac'hano e teui eunn devez  
Da varn ann dud hag ann Elez;  
Neuze, da zôn ann drompillou,  
E savimp holl euz hor beziou.

Ar re fall a iell da jamès,  
Da leski d'ar flammou griziès,  
Ar re vad a iell gant Jezuz  
Da veza da viken-euruz.

D'ar Pentécost ar Spened-Glan  
A ziskennaz, e teodou tân,  
War ann Ebestel, evit gouarn  
Iliz Jezuz dre ho daouarn.

N'euz nemed eunn Iliz hepken  
A zo famill ar ghristenien,  
Famill ar ghristenien fidel  
Didan Jezuz bag he vikel.

Enn Iliz en deuz bet lezet  
Jezuz eunn tensor kac'r meurhod,  
Seiz feunteun ar Sacramanchou  
Da skuil war-n-omp he veritou.

Dre-z-ho ar c'hraç so d'e-omp roet,  
Kendalc'het enn-omp ha kresket,  
Hag o pec'hi mar he c'hollomp  
Dre-z-ho he c'havout a hellomp.

Ar Vadisiant a rent divlam  
Euz a bec'het hon tad Adam,  
Hon gra bugale da Zoue  
Hag heritourien euz ann ee.

Ar Gonfirmation d'hon derc'hel  
A ro d'e-omp ar Spened-Santel,  
Gant nerz da chom ferm el lezen  
Enn despet d'hon enebourien.

E sacramant ar Binijen  
E reur d'e-omp, dre ann absolven,  
Graç ha pardoun euz ar pec'het  
Goude Badisiant c'hoarvezet.

Er Sacramant euz ann Aoter  
 E ma Jezuz-Christ, hor Salver,  
 Evit mezur hon eneou  
 Ha chelaou ouz hon pedennou.  
 Ann Nouën-Santel a effaç  
 Ar pec'héjou a chomfe c'hoaz,  
 Hor c'hreva da c'houzany hor poan,  
 Ha da enebi ouz Satan;

Ha pa ve profit ann éné  
 E ro d'ar c'horf iec'het ive :  
 Rak-se pa'n em gaver gwal glàn  
 E fell kaout recours d'ezhan.

Ann Urz eo a ra beleien  
 Da lavaret anñ oferen,  
 Ha da zicour ann dud fidel  
 Da vont d'ar vuez eternal.

Ar Briedelez a laka  
 Daou bried christen da yeva  
 A unan hag e karantez,  
 Ha da zével mad ho lignez.

Gwerc'hez, pedit ho Map Jezuz,  
 Da rei d'in eur c'hraç priciuz,  
 Da gredi ferm ha da heuil reiz  
 Ann holl artiklou euz ar feiz.

### HUANADOU AR PEC'HER.

Ton : *J'ai péché des mon enfance.*

A vianig am euz pec'hét  
 Hag'offanset ma Doue ;  
 Ma ene paour am euz lazet,  
 Ah! pebez malheur d'in-me!

#### DISKAN.

Gwerc'hez Vari, leun a drue,  
 C'houi a zo ma Mãm bepred ;  
 Gwélet a rit stad ma ene,  
 Grit ma kùtinn ar pec'het.

Piou a chéncio ma daoulagad  
 E diou feunteun a zaérou  
 Ha ma daërou e daërou goad  
 Evid gwéla ma c'hollou?

Ia, evid eunn netra, siouaz !  
 Me am euz sacriflet  
 Madou ha n'ho devoa biskoaz  
 Ho friz é-touez-traou ar bed.

Kouls se bet e oann meurbed kër  
 Da dri Ferson ann Dreindet ;  
 Mes brema dizemt ha pec'her,  
 Da Satan me zo gwerzet.

Skrivet kaer a oa ho hano  
 Em ene neat a bec'het ;  
 Brema ez ounn leun a vico :  
 Peghement ounn-me chenchet !  
 Graç ma Jezuz, graç ma Salver,  
 Ghened kenta ma ene,  
 Pensoz ha petra da ober  
 'Vit ho kaout adarre ?

Perak ne ket deut, hep damant,  
 Ar maro kriz d'am ghervel,  
 Divar maen-font ma badisant  
 Pe mailhuroz ma c'havel ?

Neuze da viana, ma Doue,  
 N'em bije ket het tennet  
 Koler ma Mestr ha ma Roue,  
 Siouaz ! evel em euz gret.

Migrounet treitour d'am ene,  
 Ma enebourien touet,  
 Nag a c'hilac'har a goust d'in-me  
 D'ho peza anavezet !

Teodou trempet eni ampoëzon  
 Eveuz ar puns ifernal  
 C'houi hoc'h euz souillet ma c'halon  
 Dre bep seurt kentelliou fall.

Em ene ez int treantet,  
 Evel griet int ouz-in ;  
 D'ho zrec'hi, Salver bennighet,  
 Roit eur zicour-bennag d'in.  
 Pardounet hoc'h euz da Zant Per  
 Hag ivez d'ar Vadalen ;  
 Pardounit d'in, ô ma Salver  
 N'hoc'h offansinn mui biken.

### AR MARO.

*Ton : Arrête ici ! passant...*

Chelaouit, ma Jezuz, chelaouit ouz ma feden,  
 Mervel a zo spontuz, em maro deut d'am difenn.

*Diskan.*

Gwerc'hez Vari, ma Mamm leun a druc,  
 Em maro gant Jezuz roit sicour d'am ene.

Pa deui spez ar maro da spontia ma daoulagad,  
 Diskouezet d'in, Jezuz, bizaj ha kalon eunn tad.

Pa deui c'houezen ma zal ha ma diou jod dislivet  
 D'ober euz d'ar re-all, c'houi, ma Jezuz, tostaet.

Pa n'hellinn ken klevet komzou ann dud, ma Salver,  
 Komzit c'houi d'am c'halon gant ho mouez dous ha tener  
 'Vit ar weach diveza pa larinn : Jezuz Jezuz !  
 Klevit, ô ma Salver, ouz ho pughel truezuz.

Pa gouezo ann daerou diouz ma lagad ô vervel,  
 Bennighet-hé Jezuz, grit ma vint-daerou santel.

O Jezuz, pa velot ma c'haloun aour o ranna,  
 War ma foan ma anken skullit eur bepadk joa.

Pa vo red d'in kuitai traou ar bed evit jamés,  
 Bezit, c'houi, ma Jezuz, ma mad, ma finvidighez.  
 Pa'n em dispartio evez ma c'horf ma ene,  
 Recevit, ma Jezuz, ann ofranz euz ma bue.  
 Enn ho pardedighez pa vezina, ó ma Jezuz,  
 Bezit dous em c'henver : roit d'in ar vuez euruz.  
 Me laka ma feden, ma buez ha ma maro  
 Etre daouarn Jezuz ha Rouanez ann Envo.

### AR FINVEZOU DIVEZA.

Ton : *Arrête ici ! passant...*

Sonjomp e gwirionez, sonjomp enn eternite :  
 Holl goude hon maro e vimp barriet gant Doue,

*Diskan.*

Gwerc'hez Vari, hon Mamm leun a druc,  
 Ann ifern so (\*) spountuz, grit ma'z imp holl d'ann ee,  
 Neuze gant eur spout vraz, hep gallout en em guza ;  
 E reutimp piz hor compt, ha d'ar barner ar rusta.

Eur zetanz a glevimp a vuez pe a varo,  
 Hag hor stad goude-ze da virviken a bado.

Nemed eur weach hepken ar baradoz na goller,  
 Biken euz ann ifern en em denna na heller.

Doue en deuz roet ar choaz d'e-omp holl, christianien,  
 D'ann eil pe eghile e vo red mont da viken.

Ar bed a duemeno, ni a dremeno ive,  
 Mes ann ifern a chom hed ann holl eternite.

(\*) *Ar varo a zo.*

Siouaz ! peghen braz eo dallidighez ar pec'her :  
 Klask war bord ann ifern eur blijadurez distri !

Peghen fer eo ann den a ra pinijen amá,  
 Evit mont gant Doue d'ann eurused ha d'ar joa.

Ar seurt-se n'ho deuz ket a velkoni o vervel :  
 Ho c'halon a zigor d'ar joasded eternel.

Covessaomp holl ervad hor pec'hejou tremenet,  
 Ha goulennomp pardoun gant eur galon glac'halet.

Bevomp breina gwolloc'h, hep compta pell da veva  
 Tremenomp peb devez vel pa vez hon-diveza.

Greomp brezel d'ar c'hik, d'ar bed ha d'ann droug-spered  
 Ha gant siccour Doue pellaomp euz a bep pec'het.

Neuze dirag Jezuz ni hello, enn hor maro,  
 Comparissa hep spout ha gant-han mont d'ann Envo,

### SANTIMANHOU A GONTRITION.

Ton anavezet.

Doue, gwir bried  
 D'ann enec,  
 C'houl 'e'h euz ma c'hrouet,  
 C'houl 'e'h euz ma frenet ;  
 C'houl 'e'h euz ma c'hrouet,  
 C'houl am salvo.

Aboe pell amzer,  
 — N'hellann ket nac'h —  
 Ez ounn, ma Salver,  
 Siouaz ! eur pec'her !  
 Ez ounn, ma Salver  
 Enebour d'ha c'h.

*Diskan.* { Gwerc'hez benniguet,  
 Mamm druezuz,  
 Me eo 'm' euz lazet  
 — Hen gouzout a ret —  
 Me eo 'm' euz lazet  
 Map Jezuz.

Eur bughel tec'het  
 A di-he dad,  
 Eunn danvad collet  
 Ha pell dianket,  
 Eunn danvad collet  
 A zo bet cat.

Ia, me a zo bet,  
Bete breman,  
Ah! ken aheurtet  
Ebarz ma fec'het!  
Ah! ken aheurtet!  
Chenj a renkann.

Pignomp ma ene,  
War ar c'halvar,  
Gwelomp cunni Doue  
Leun a garantez,  
Gwelomp cunni Doue.  
Enn he c'hlac'har.

He dreid so griet  
Gand ann tachou,  
He gorf dispennet,  
He benn curunet,  
He gorf dispennet.  
Gand ar fouéou.

Gwel-hen diwisket,  
Savet er groaz,  
He zaouarn staghet,  
He gostez toulet,  
He zaouarn staghet  
Gant tachou braz.

Me eo, ma Doue,  
- Me ma-tinaj,  
Em euz hep true,  
Dre ma gwal vuc,  
Em euz hep true  
Cresket ho poan.

Me vel pardounet  
Ar map prodig,  
Meur den a bec'het  
- Eur plac'h dirollet -  
Meur den a bec'het,  
Eul laer publik.

C'houi-a zo bepred  
Eur gwir Salver,  
Na c'houlennit ket  
E ve den collet,  
Na c'houlennit ket  
Coll ar pecher.

D'ho treid e pokann,  
Gant Madalen,  
Re e taleann,  
- Re hell e talc'hann, -  
Re e taleann  
Ma finjen.

Ghened coz bepred,  
Bepred nevez,  
Poent eo ho caret,  
Salver henniguet,  
Poent eo ho caret  
E gwirionez.

Arru eo ann de  
Ma consacran  
Ma nerz, ma huc  
D'hoc'h, o ma Doue,  
Ma nerz, ma huc  
D'ho servichan.

CANTIC AR BARADOS.

Jezuz peghen vraz ve  
Plijadur ann ene  
Pa vev e grac Doue  
Hag e sol euz ann ee

Berr cavann ann amzer  
Hag ar poanion distoc  
O sonjal deiz ha noz  
E gloar ar baradöz.

{bis.}

{b.}

Pa zellann euz  
E-treze ma gwir vro,  
Nijal di a garesn  
Evel eur goulmikwemp.

Gant joa e c'hortozann  
Ann termen divezan,  
Hast ann euz da w'let  
Jezuz ma gwir bried.

Rak weuze, me esper,  
Drevezit ma Salver,  
Ann heritag euzuz  
Prenet d'in gant Jezuz.

Kerkent ha ma vezo  
Torret ma chadenno  
Me a zav euz ann er  
Evel eunn alc'houeder.

Tremen a rinn al loaf  
Erit mohet d'ar gloar  
Dreist ann heol, ar stered  
Me a vezo doughet.

Pa vinn uz d'ann douar  
Traonien leun a c'hlac'har,  
Neuze me rei eur zell  
Ouz ma bro Breiz-Izel.

Neuze me lavarö  
Kenavo d'id ma bro,  
Kenavo bed poanuz  
Gant da bechou rec'huz.

Kenavo paourente,  
Kenavo vanite  
Kenavo trubuilou,  
Kenavo pechejou.

Pelloc'h na zoujinn ket  
Ardou ann droug-spered;  
Biken mu'n'am zromplo  
Goudé pred ar maro.

Goude pred ar maro  
Joauz me a gano:  
Torret eo ma chaden  
Ha me libr da viken.

A bep tu pa zellinn  
Kement tra a welinn  
A gargo ma c'halon  
A gonsolation.

Doriou ar baradöz  
Digor ouz ma gortoz,  
Ar Sent ha Sentezed  
Prest d'am dighemeret.

Me vo dighemeret  
E palez ann Brinded.  
E-kreiz ann enoniou  
Hag ar meuleudiou.

Me hello evit mad  
Gwelet Doue ann Tad,  
Gand he Vap Eternel  
Hag ar Spered-Santel.

Me a welo Jezuz,  
Gand eur vraz joauz,  
O lakat war ma fenn  
Eur gaer a gurunen.

Ouz penn me a glovo  
Euz he berz ar c'hoanzo  
Deut, servicher fidel,  
Deut d'ar gloar eternel.

{b.}

{b.}

{b.}

{b.}

{b.}

{b.}

{b.}

{b.}

{b.}

Evit poaniou dister  
Evit ankenlou berr,  
Me vezo paëet mad  
Gant Doue ma gwir Dad. } b.

Caer a vezo gwelet  
Ar Werc'hez bennighet,  
Gant daouzek stereden } b.  
A ra he c'harunen.

Gwelet a rann ivez,  
Ann Elez, Arc'helez,  
O rej meuleudiou } b.  
Da Grouer ann Envou.

Me welo ar sened,  
Euz ar batriarched,  
Hag euz ar bropheted, } b.  
Tud a-goz curunet.

Ann Ebestel euzuz  
Gant diskiblet Jezuz

Hag ann holl verzerien, } b.  
Enor ar Ghristenien.

Eno me welo c'hoaz,  
Leun a c'hoar hag a c'hrac  
Tud savet a bep lec'h, } b.  
Beteien ha menez'h;

Gwerc'hezed a bep oad,  
Sentezed a bep stad,  
Graghez, intanvezed, } b.  
Gant Doue curunet.

Eurisded hep he far,  
Enn gortoz, me ho kar:  
C'houi gonsol ma c'ha- } b.  
E peb affliction. [lon,

Em holl boaniou calet,  
A gorf pe a spered,  
Me sonjo dez ha noz } b.  
E gloar ar baradoz.

Petra rinn me'ta, siouaz d'in!  
Pa'z ouñn d'ho receo ken indign?  
Livirit eur gher, ma Doue,  
Hag a vo pare ma ene.

Ma Doue, me zo glac'haret  
D'ho peza kement offanset;  
Hag a fell d'in e guirionez  
Lakât gwelloc'h urz em buez.

Credi a rann, ô ma 'Doue,  
A galon hag e gwirione,  
Ar pezh hoc'h euz d'e-omp revelet,  
Ha dre antr'Iliz diskleriet.

Ma Doue, ma holl esperans,  
Enn-hoc'h e ma ma holl fisians,  
Rak c'houi a zo fidel d'ho ker,  
Holl-c'halloudek, mad em c'henver.

Doue, leun a berfection,  
Me ho kar a greiz ma c'halon;  
Ha ma nessa garann ive,  
Abalamour d'hoc'h, ma Doue.

Ah! pebez dezir am-euz-me  
Da rei ma c'halon da Zoue!  
Diskennit enn-hi, ma Jezuz,  
Hastit he renta evuruz.

### EVIT AR GOMMUNION.

Ton : *Werc'hez Vari, c'houi...*

Me gred ferm hep doutanz e-bed,  
Ez ann da receo enn effet  
Jezuz gwir den ha gwir Doue,  
Er Saeramant a garantez.

Allaz! allaz! piou ez ouñn-me  
Da dostât ouz-hoc'h, ma Doue?  
N'ouñn nemet eur bec'herez kez  
Ha c'houi zo leun a santelez.

Gwerc'hez Vari, Mamm da Jezuz,  
 Roit d'in ho Map trugarezuz;  
 Ma sikourit, Mamm a druez,  
 Da vont d'ar gwir dour a vuez.  
 Ma El-mad, mirer d'am ene,  
 Me ho ped, dre ho trugare,  
 Na lezit ket ann drong-spered  
 D'am zroubli e feçoun e-bed,  
 Me ho ped, Sent ha Sentezed,  
 Ha c'houi holl, Elez bennighet,  
 Enn digoll euz ma faourentez  
 Roit da Zoue ho santelez.

**MEMEZ TRA.**

Ton anavezet.

Elez euz ar baradoz, sellit pebez enor  
 A ra d'e-omp er Sacramant Jezuz hon Redemptor;  
 Eur waach evit hor prena ez eo bet incarnet,  
 Hag evit dont d'hor maga en em incarn bepred.

*Diskan.*

Mari, gwir Vamm da Jezuz, Mari, ma mamm denor,  
 Ma zikourit da receo ho Map ha ma Salver;  
 Me ne d-ounn, siouazi netra, netra, nemet pec'het,  
 Mes enn-hoc'h ec'h esperant, ô ma Mamm beanighet.

Crouer ann Env, ann douar, war ann aoter, bernde,  
 Dre gomz nerzuz ar beleg a ziskenn euz ann ee!  
 Eunn Doue kalz uheloc'h euid ar firmamant,  
 Er em izela didan speçou ar Sacramant!

Eunn Doue ne eben James e-pad ann holl amzer,  
 Eunn Doue war hal he zorn a zoug ar bed antier  
 En em lez dre ar beleg da veza diblacet,  
 Evit diskenn e kalon ar paouza zo er bed.

O miracl ar souezussan efre ar miraclou!  
 O burzud ne hell comprenn ar c'haeran, sperejou!  
 Evit gounit calonou ho bugale ingrat,  
 Ho maghit, ô ma Jezuz, gant ho corf hag ho coad.

Nan, euid eur map unik ar Vamm ann denera,  
 Biscoaz na zantaz kement he c'halon o tomma:  
 Goude ken braz carantez! ah! piou helpe refuz  
 Consaeri he holl galon d'ho carout, ma Jezuz?  
 Mar d-eo dister calonou ar Sent hag ann Elez,  
 Evit carout eunn Doue ken dign a garantez,  
 Penaoz e prizit, Jezuz, dre ar gommunion  
 E calonou ken sclasset dont da ober ho tren?

Penaoz credi azeza oiz taol sacr eunn Doue  
 Goude beza offanset kemend he vajeite?  
 D'ho taoulagad, ma Salver, na hellomp prezanti  
 Nemet calonou, siouaz! teun a ingrateri.

Couscoude pa gommandit tostât ouz ho panket  
 Dre eur gomz a drugarez effacit hor pec'het,  
 Teuzit sclas hor c'halonou gant tan ho carantez  
 Neuze hi ho recevo gant joa ha zantelez.

Pebez laouenidighez! souden e possedinn  
 Muia caret ma c'halon ha ma fried divin!  
 He ene gant ma ene Jezuz a unisso!  
 Gand ma goad em holl mempron goad Jezuz a reao!

Prestit d'in ho tiou-askel; ma El-mad sourciuz,  
 Ma nijinn evel eur goulm etre divrec'h Jezuz!  
 Merai d'ezhan ma c'halon, hen ral d'in he fin!  
 Euz ma n'arapoze tranquil ha dizourci.

**MEMEZ TRA.**

Ton anavezet.

Deut holl, ha deut gant fe,  
Deut d'ar banket priciuz;  
Galvet oc'h gant Doue  
Da zibri ouz taol Jezuz;  
Jezuz!

Baradoz ann ene,  
Eo chom gan-hoc'h noz-de.

Mar c'hoantait mado,  
Ama e ma ann tenzor  
Pehini ho rento

Pinvikoc'h evid ar mor  
Jezuz!

Perc'hen ann holl vadou  
Ha mestr ann holl c'hraçou.

Ann arc'hant hag ann aour  
Ne d-int nemet paourte  
E kichen ann tezaour  
A ofr d'e-omp-ni Map Doue,  
Jezuz!

A ro d'e-omp he holl vad.  
Evit hór pinvikat.

He gorf, goad hag ene  
Ebarz ann hosti cuzet  
Gand he zivinite  
A vezo meuz ar banket :  
Jezuz!

N'euz netra dialluz,  
D'ho carantez nerzuz.

M'her gwel war ann Aoter  
Devet gand ar garante,

O c'hortoz ar pec'her  
Evit tomna he ene,  
Jezuz!

A c'houlenn hor c'halon  
Evit beza he dron.

Ne ket bet countantet  
Da vervel war ar c'halvar,  
C'hoaz en-deuz teurvezet  
Chom gan-omp war an douar  
Jezuz!

Prest da vezur bemde  
Hor c'horf hag hon ene.

Holl Sent euz ann Envou,  
I restit d'in ho carante,  
Roit d'in ho calonou  
Evit carout ma Doue;  
Jezuz!

Bezit ma c'barante  
Hag enn noz, hag enn de.

Langhissa rann gant c'hoant  
Da derra naon ma ene,  
Dre ar meuz excellent  
Preparet d'in gant Doue,  
Jezuz!

Contantit ma c'halon  
Dre ar gommunion.

Mes allaz! pa zonzann  
Penaoz em euz ofanset  
Ar mignon ar gwellan  
Hag ar fidella pried :  
Jezuz

Sant glac'har em c'halon  
E c'houlennann pardon.

Nann, na veritann ket,  
M'hen ansao gant gwirionez,  
Goude beza pec'het  
Dibri-bara ann Elez :  
Jezuz!

C'houi so ar santalez,  
Ha me eur pec'her kez.

Gwéré'hez, Sent hag Elez,  
Deskit d'e-omp ho canticou

Mac'h unanimp hor mouez  
Da veuil holl ann Aotrou;  
Jezuz!

A verit ann holl c'haloar  
Enn env hag enni douar.

Gloar; enor; carante  
Enn tabernaclou santel,  
Da Jezuz, Map Doue,  
Enor ha gloar éternel;  
Jezuz!

Bezit dre holl meulet  
Ha gand ann holl caret.

**MEMEZ TRA.**

Ton : *Bénissons à Jamais.*

*Diskan.*

Meulomp holl da james  
Jezuz hag he vadelez.

Me ho meul, ó ma Jezuz!  
C'houi hoc'h euz ma c'hrouet,  
C'houi hoc'h euz ma frenet,  
C'houi am mag, ó ma Jezuz!

Mil beanoz d'hoc'h, ó Jezuz!  
C'houi a zo ma pastor,  
C'houi a zo ma zenzor  
C'houi zo ma holl vad, Jezuz.

Pardounit, ó ma Jezuz!  
Ma factou tremenet :

} *bls.*

Eunn amzer da zonet  
 Me vo fidel d'hoc'h, Jezuz  
 Bennighet, ô ma Jezuz!  
 Ma c'horf ha ma ene,  
 Ma mirit noz ha de  
 Euz â bep droug, ô Jezuz!  
 Hastit! hastit, ô Jezuz  
 Terri ma chadennou,  
 Ah! pegouls enn Envou,  
 Ho meulinn-me, ô Jezuz!  
 Ra vezo meulet Jezuz,  
 Dre holl, da bep mare :  
 Ni bemnoz ha bemde  
 Meulomp holl, meulomp Jezuz.

**GUERZ ANN ENE DEVOT.**

*Tôn: Eunn dezir braz am euz.*

Eunn dezir braz am euz da virviken da garet,  
 Jezuz, gwir Vap-Doue ha ma Salver bennighet!

*Diskan.*

O ma Jezuz! ô ma c'harantez!  
 Bezit em c'halon ha bemnoz ha bemdez!

Ma Jezuz, c'houi so mad, c'houi a zo trugarezuz,  
 Ma Jezuz, c'houi so dous, c'houi a zo carantezuz

Bete breman ounn bet, sionaz! en em abuzet  
 Gand afferiou ar bed, ha gand he vadou dallet.

Mes breman, ma Jezuz, me n'eo d'hoc'h ma ene,  
 Ma c'horf ha ma c'halon, 'vit ar rest euz ma buë.

O pebez carantez hoc'h eus-lia bet, ma Salver;  
 Ba veza bet scufflet ho coad' evid ar pec'het.

Peghen euzuz eta, peghen droug eo ar pec'het,  
 Pa en deuz ho lazet, ma Redemptor bennighet!

O pec'het milligbet, dont a rann d'az detesti  
 Ha n'am bezo pelloc'h ouz-id nemet cassoni.

Ra vezo great bepred eur brezel continuel  
 Dre bevar c'horn ar bed d'ann holl bec'héjou marvel.

Peghen glac'haret ounn da veza bet onanset  
 Eunn Doue so ken mad, ken dign da veza caré.

Dre ho craç, ma Jezuz, me fell d'in en em viref  
 Ar rest euz ma buë, euz ar viç, euz ar pec'het.

Ann ene ar c'haera dira-z-hoc'h kent, ma Jezuz,  
 A ve dre ar pec'het rentet issam hag euzuz.

N'am lezit ket eta, ô ma Salver bennighet,  
 N'am lezit birviken da goueza mil er pec'het.

Sellit, ô ma Jezuz, ouz-lia a druez brema,  
 Roit d'in graçou nerzuz da zerc'hel ma fromessa.

Grit c'hoaz, me ho suppli, d'in ma-unan ma varvion,  
 Hag evid hoc'h hepken grit d'in pelloc'h ma vevion.

N'am euz, ô ma Jezuz, ken dezir war ann douar,  
 Nemet d'ho kwelst-hu da virviken enn ho kloar.

Lanhissa rann er bed dre forz gortoz ann devez  
 Mac'h hellinn ho meult gand ar Sent hag ann Elez.

Ra viot a vregma kouls hag enn eternite  
 Meulet, trugareket, hag enn douar hag enn co!

CANTIC A DRUGAREZ.

Ton : *Bénissons.*

DISKAN.

Meulomp holl da james

Doue leun a vadelez.

} *bis.*

Meulit-hen, Elez santel,

Meulit he vadelez ;

Rentit d'he drugarez.

Mil meuleudi eternel.

Biscoaz tad ne oe gwelet

Ken mad d'he vugale,

Ken zourciuz noz-de

D'ho diwall corf ha spered.

Pastor carantek meurbet,

Na espern ket he boan :

Klask a-ra heb chan

Ann danvad kez dianket.

Lamet en deuz ann anken

A oa war ma spered ;

Tre'e'h da jalmou ar bed

Torret en deuz ma chaden.

Ma rentet en deuz-pare ;

Evel eur mediein ;

Hag he vanket divin

A vag, a domm ma ene.

Scuil a ra gand abondans

He c'hraç brema war-n-on ;

E gwéled ma c'halon

En deuz great he zemeurans.

D'ezhan e tenn ma c'halon.

Dre he c'hraç ounn pare,

Dre he c'halloud ounn cre :

Doue a zo d'in mignon.

Hen eo ma finvidiguez,

Ma nerz ha ma skoazel,

Ma joa bete mervel :

Ra ganinn 'ta em buez :

ENN ENOR DA GALON JEZUZ.

Ton : *O Calon Sacr.*

O Calon Sacr euz ma Jezuz,

Calon meurbet carantezuz,

Plijit receo, me ho suppli,

Ann dezir am euz d'ho meuli.

C'houi so ar zourcen priciuz

Euz ar graçou cre ha nerzuz

A recevann da bep mare,

Hag a douch kement ma ene.

O Calon Sacr, c'houi so eunn or

Hag a welann bepred digor

Da zighemer ar bec'herien,  
Pa fell d'he ober pinijen.

Bet ounn, sionaz! O ma Salver,  
Dianaoudek enn ho kenver:

Sellit ouz ma ene ingrut,  
Distrei a rann a galon vad.

Torret am euz-lezen Doue  
Cant ha cant mil gwech em bue:  
Muntrer ifam, pec'her-divad,  
Treuzet am euz calon ma Zad.

Dira-z-hoc'h, Calon adorabl,  
Me ra ma amand enorabl,  
Pardon euz ma sacrilejou,  
Pardon euz ma holl bec'hejou.

Pardounit ive ar c'hirimou,  
Blasphemou, irreverançou  
Great bemdez gant ar bananed  
Ha gant ann holl heretiked.

Mès siouaz! d'e-onñ-ni christenien,  
N'hon euz bet nemet iénien  
Evit karantez hor Salver  
Er Sacramant euz ann Aoter.

Stouet holl beteg ann douar,  
Hon e'halon rannet gant glac'bar,

Criomp gand eur vouez truezuz:  
Pardon, pardon, Calon Jezuz!

Pastor mad, e'houi hoc'h euz klasket  
Ann danvad a oa dianket:  
Chetu-hi o c'houlenn pardon,  
Digoret d'ezhi ho Calon:

Me garfe gant ma goad gwalc'hi  
Ma malic, ma ingrateri:  
Da vibana me ho gwélo  
Beteg ann heur euz ma maro.

Ouzpenn-ze enn hoc'h Ilizou  
Gant respet e rinn pedennou;  
Ha gand eur gwir devotion  
Me iello d'ar gommunion.

D'ann oferen ez inn ive  
Gant feiz ha gant humilite:  
Oñ a rinn eno d'ho justis  
Ho Calon Sacre e sacrifis.

Esper am euz da repari  
Ma malic, ma ingrateri,  
Dre verit ho coad priciuz,  
Hag ho calon carantezuz.

Kemerit ivez evit kred  
Calon ho Mamm zo bet treuzet

Enn harz ar groaz gant seiz cleze  
 Dre ann nerz euz he c'harante.  
 Unanomp brema hor mouésiou  
 Leveromp dre hor c'hanticou :  
 Gloar d'ho calon, Salver Jezuz,  
 Gloar d'ho calon, Mamm druezuz.

VAR AR PURGATOR.

Allas! na oufé den comprenn  
 Peghen estlamm eo hon anken ;  
 Hor pinijen a zô kalot :  
 Enn han' Doue, hor sikouret.

DISKAN.

Breudeur, kerent ha mignoned  
 Enn han' Doue, hor chilaouet,  
 Enn han' Doue, hor sikouret.

A bep tu d'e-omp n'euz nemet tan,  
 Tan var c'horre, ha tan dindan :  
 C'houi hon euz-ni kement caret,  
 Enn han' Doue, hor sikouret.

Sonjit enn ho tad, enn ho mamm  
 Er purgator, e-kreiz ar flamm :  
 Ma map, ma mere'h, ah! chilaouet  
 Enn han' Doue, hor sikouret.

Ni n'hellomp dre hor pedennou  
 Distan, na berraat hor poaniou,  
 Doue ouz-omp na chilaou ket :  
 Enn han' Doue, hor sikouret.

Da gontanti justis Doue,  
 Evid-omp, ah! pedit bernde  
 Dre aluzen, mar hor c'haret,  
 Enn han' Doue, hor sikouret.

Kalz a hellit dre ho poaniou,  
 Hoc'h iuniou hag oferennou ;  
 Ken didruez na vezit ket :  
 Enn han' Doue, hor sikouret.

Ha pa vimp-ni e gloar Doue,  
 Evid-hoc'h ni bedo ive ;  
 Ouz-omp eta holl chilaouet,  
 Enn han' Doue, hor sikouret.

CANTIK AL LABOURER DEVOT.

Ton : *O caëra instruction.*

Ama pell euz ann trouz  
 Hag holl safar ar bed,  
 Ar meziou am e'heleñ kerkouls  
 Hag ann habila doctored.

Ann douar a fouruiz  
 Frouez neve d'ar pouniour;  
 N'ho ro ket d'ar feneantiz;  
 N'euz ket a vloavez hep labour.

Me a wel ar guenan  
 Savet da c'houlou-de :  
 Me ivez a lle kemer poan  
 Da brosta euz grac Doue.

Ann dour-red, hep arest,  
 A dreuz ar bokedou;  
 Da Zoue e tleann mont prest,  
 Hep luia er plijaduriou.

Eunn oanik gant fisians  
 A heuil he c'houarnour;  
 Heuil Jezuz eo ma asurans,  
 Ann droug-spered a zo treitour.

Ar gwé braz, enn avel,  
 A bep tu zo fouéted  
 Koueza rinn mar savann uhel,  
 Surroc'h eo eur vertuz kuzet.

Ann deliou a chom fresk  
 Pa vent stag ouz ar gué :  
 Evel deliou dinerz ha bresk,  
 E kouézinn distag ouz Doue.

Ann ecleo a respont,  
 Er c'hoat pa lie c'halvann;  
 P'am galv Doue, elec'h respont  
 Ne rann lies van tien c'hlevann.

Ar bokedou a sao  
 Hag a zec'h enn eunn dé :  
 Allaz ! na vevin ket atao,  
 Hep dale me gouezo ive.

Al laboussed a gan  
 Meuleudi d'ho C'hrouer;  
 Ho ghez hag ho frez am c'hondan,  
 Ma n'her meulann e peb amzer.

Gwennat a ra ma bleo  
 Enn erc'h ha frimm ar goan;  
 Ma daouarn a skarr gand a réo,  
 Més goaz mil gwech a veritann.

Devet ounn gand ar c'hrouez,  
 Dindan ann héol d'ann han;  
 Tomder hag héol a zo traou ez,  
 Ouz kroaz ma Salver pa zellann.

Holl evid-hoc'h eta,  
 Doue a garantez,  
 Pogh, labour, melkoni ha joa,  
 Hirio hag e-pad ma buez.

## REOLEN A VUEZ.

Ton anavezet.

Chetu aman eur reolen.

Evit beva e gwir ghristen. *(bis)*

Pa zihunit, roit da Zoue

Ho kalon, hoc'h œuvrou enn dé.

Goude m'oc'h savet ha gwisket,

Grit ho pedennou daoulinet.

Bezit fidel da labourat

Evit gloar Doue, enn ho stad.

Livirit, pa viot tentet :

Jezuz, Mari, ma zikouret.

Bemnoz holl, enn ho tiéghez,

Grit ar pedennou assamblez.

Hoc'h examin kent ar repoz :

Marteze e varfot enn noz.

D'ar sul ann offiçou heuliet

Ha festou ar bed dilezet.

Covessait, mar ghellit bep miz,

Ha communiit dre aviz.

Ispicial en em viret

Ouz ar pec'het ma'z oc'h boazet

Pellait euz al leou-doued,  
Ar c'homzou brein ha goloet.

C'hoaz peb christen a dle diwall-  
Da zroug-prezeg, da zroug-sonjal

Kassait ar faoutou bihana  
Pere a denn d'ar re vrassa.

Jamès na dleit chom da baouez  
Na heuil ar gwal gompagnunez.

Karit ho Toue da ghenta,  
Goude, evel-d-hoc'h ho nessa.

Sonjit er varn hag er maro,  
Sonjit enn ifern, enn evô.

## ANN ANGËLUS.

Ton : *Eun Arc'het...*

Eunn Arc'het, a-berz ann Aotrou,  
A ziskennaz euz ann Envou,  
D'annonç da Vari oa choazet  
Evit Mamm da Salver ar bed.

Mari a respontaz neuze :

« Servicherez ounn da Zoue :

« Bezet great eta em andred,

« Hervez m'hoc'h euz d'in-annoncet. »

Kerkent concevaz eur bughel,  
 Dre vertuz ar Speread-Santel.  
 Hag ann eil Ferson incarnet  
 E-touez ann dud en deuz bevet.

Pedit, Mamma santel da Zoue,  
 Evid-omp holl he vajeuste :  
 Ma vezimp dign euz ar graçou  
 A bromet Jezuz hon Aotrou :

Ma Doue, pa'z omp kelennet,  
 Gand ann El en deuz diskleriet  
 Ann incarnation eüruz  
 Euz hon Aotrou, ho Map Jezuz,

Dre-z-hi plijit gan-hoc'h ive  
 Skuilla ho kraç enn hon ene :  
 M'hor c'hunduo he bassion  
 Da c'hloar he resurrection.

**MEMEZ TRA.**

En amzer Basq. — Ton : *O filii et filie.*

En em roit d'ar joa, ô Gwerc'hez,  
 Rouanez ar Sent hag Elez,  
 Ho Map a zo leun a vuez :

Meulomp Doue...

Ann Hini hoc'h euz bet ganet,  
 Ha gant ho leaz, Mari, maghet,  
 Kaer euz ar bez a zo savet :

Meulomp Doue...

Hervez-he lavar, hor Salver  
 Euz ar bez a sav gant sclerder,  
 Enn despet da c'hard ar gouarner :

Meulomp Doue...

Joaussait, Gwerc'hez, gant-han,  
 Ha pedit ivez anezhan,  
 Evid-omp-ni holl er bed-man.

Meulomp Doue...

**AR ROZERA. — CHAPELED A JOA**

Ton : *Eun Doue hephen a adori.*

1. Sonjomp d'ar ghenta dizenez  
 Er joa en devoa ar Werc'hez,  
 Pa oe gant ann El saludet  
 Da veza Mamm-Salver ar bed.

2. Enn eil myster sellomp Mari  
 O kuitat he bro hag he zi,  
 Evit gwelet Elizabeth,  
 A zeughe Sant Ian bennighet.

3. Enn drede myster hor Salvor  
 So ganet enn eur c'hraou dister,  
 Hag a lavar d'e-omp distaga  
 Hor c'halon euz traou ar bed-ma.

4. Er bevaré myster joaus,  
 Ar Werc'hez gant he Map Jezuz  
 En em offr enn templ evid-omp :  
 Gant-hé da Zoue 'n em offromp.

5. Er bempet myster ar Werc'hez  
 A gavaz goude tri devez  
 He Map e-kreiz ann doctored,  
 Leun a furnez hag a spered.

### CHAPELED A GHEUZ.

Ton: *O Italon Sakr.*

1. Ar c'henta myster truezus  
 A ziskquez d'e-omp glac'har Jezuz,  
 Beuzet enn eur c'houezen a wad,  
 Ha stouet o pedi he Dad.

2. D'ann eil myster e oa freuzet  
 He gorf santel gant taolion fouet,  
 Evid ar pec'hejou mezuz,  
 E c'houzany eur boan ken euzuz.

3. D'ann drede e oa kurunet  
 He benn sac, hep truez e-bed,  
 Dre eur gurunen great gant spenn,  
 D'hon dilivra ouz ann ifern.

4. Er bevaré myster Jezuz,  
 Didan eur groaz ponner, mezuz,  
 A gherz e-trezeg ar C'halvar;  
 Heuillomp-hen holl leun a c'hlac'har.

5. Er bempet myster Map Doue  
 A ro evid-omp he vue :  
 Piou a vezo c'hoaz ken ingrat  
 Da offansi Jezuz ken mad!

### CHAPELED A C'HLOAR.

Ton: *Gweré'hez Vari, c'hout...*  
*pe: Ad camam agui providi.*

1. Er c'henta myster gloriuz,  
 Kanomp meuleudi da Jezuz :  
 Savet eo bet evez ar bez,  
 Hervez he gomz, goude tri dez.

2. Jezuz enn eil myster a c'hloar  
 A zéu da guitat ann douar :  
 Savet a ra d'ar baradoz ;  
 Eric e ma ouz ma gortoz,

3. Enn drede myster me a wel  
 O tiskenn war ann Ebestel  
 Ar Spered-Santel euz ann Ee  
 Pehini he rent tud neve.

4. D'ar bevare myster Mari,  
 E-kreiz ar joa, ar veuleudi,  
 Corf hag ene a zo doughet  
 D'ar baradoz gant ann Eed.

5. D'ar bempet e oa kurunet  
 Mari, hor Mamm, gant ann Dreindet :  
 Enn eniv Rouanez ann Ele  
 N'ankouao ket he bugale.

ANN AVE MARIA.

Ton : *Gwerc'hez Vari, c'hout.*

Gwerc'hez Vari, a c'hraç karghet,  
 M'ho salud gant kalz a respet ;  
 Gan-hoc'h emedi ann Aotrou  
 Dre he garantez, he c'hraçou.

Mari, c'honi a zo bennighet  
 Dreist ann holl gaghez ha m'erc'hed,  
 Bennighet euz ho c'ov ar frouez,  
 Jezuz ho Map, leun a druez.

Santez Mari, Mamm da Zoue,  
 Sellit ouz-omp e peb mare !  
 Evid-omp holl pedit ato  
 Breina hag enn heur hon maro.

ANN AVE MARIS STELLA.

Ton : *Me ho salud, stereden... pe : O Calon Sacr...*  
*pe : Gwerc'hez Vari, c'hout... pe : Audi,*  
*benigne conditor...*

Ni ho salud, stereden vor,  
 Mamm da Zoue, leun a enor,  
 Gwerc'hez bepred dor ann Ehou,  
 Chelaouit ouz hon pedennou.

Recevit ar salud santel  
 A reaz d'hoc'h ann El Gabriel ;  
 Roit eur peoc'h ferm d'e-omp er bed-ma,  
 O chench ann hano a Eva.

Torrit chaden ar bec'herien,  
 D'ar re zo dall roit sklerijen ;  
 Pellait ouz-omp peb droug dalc'h-mad  
 Ha goulennit d'e-omp pep seurt mad

Diskouezet ez oc'h eur Vamm vad  
 E-kenver ann dud emzivad :  
 Grit m'hor chelaouo ann Hini  
 Hoc'h euz ganet evid-omp-ni.

Gwerc'hez dispar e peb feçon,  
 Dous dreist ann holl, pur a galon,  
 Ouz hon pec'hejou dilivret,  
 Grit ma vimp dous ha chast bepred.  
 Grit ma vezo hor buez pur,  
 Preparit d'eomp ann hent assur;  
 Ma vezimp, o welet Jezuz,  
 Eunn deiz gan-hoc'h bepred euruz.  
 Gloar ato d'ann Tad Eternel,  
 D'ar Map ha d'ar Spered-Santel;  
 D'ann Tri Ferson euz ann Dreindet  
 Ar memez enor so dleet.

**AR SALVE REGINA.**

Ton : *Ni ho salud Rouanez...*

Ni ho salud, Rouanez ann Elez,  
 C'houi zo hon Mamm ar Vamm a drugarez,  
 Hon oll dousder, buez hag esperans,  
 Ni ho salud gant kalz a reverans.  
 D'hoc'h-hu, Gwerc'hez, e kassomphor peden,  
 Ni divroet, ha siouaz ! pec'herien :  
 Ouz-hoc'h, Gwerc'hez, e kriomp er bed-ma,  
 Ni pere zo bugale da Eva.

D'hoc'h-hu bepred e tenn hor c'halonou,  
 D'hoc'h'e kassomp hor goelvan, hon daélou:  
 Hon fisians-ni so enn ho madelez  
 Enn draonien-mâ leun a dristidighez.  
 Rak-se pa'z oc'h hon Advocadez kër,  
 Enn hor c'henver bepred dous ha tener,  
 Plijit gan-hoc'h distrei ho taoulagad  
 War-n-omp-ni holl ha proculi hor mad.  
 Pa zeui ann deiz da guitât ar bed-man,  
 Goude ar fin euz hon exil aman,  
 Diskouezet d'e-omp neuze, Mamm a druez,  
 Bizaj Jezuz, evcuz ho c'oy ar frouez.  
 O Gwerc'hez sacr, meurbed karantezuz,  
 O Gwerc'hez dous, ô Mari truezuz,  
 Ni ho suppli, klevit ouz hor peden,  
 Ha na zeuit ket d'hon dilezel biken.  
 Evid-omp holl, Mamm santel da Zoue  
 Plijit gan-hoc'h pidi he vajeste,  
 Ma viritimp receo ar faveriou  
 D'e-omp prometet gant Jezuz hon Aotrou.

**AR MEMORARE.**

Ton anavezet

pe. : *Caeroc'h 'vid eur stereden vintln.*

O Gwerc'hez Vari, leun a druez,  
 Ho pezit envor, me ho ped,

Penaoz biskoaz den, enn he vue,  
 N'en deuz na gwelet na klevet  
 Ho pije lézet enn abandon  
 Nikun a ghemment a zeuche  
 D'en em erbedi d'hoc'h a galon,  
 Daoust peghen braz pec'her vije.  
 Nunn, ne zeuit james da zilezel  
 Nep a zeu, gant fisians enn-hoc'h,  
 Da guza didan ho tiouaskel,  
 Ha da c'houlenn skoazel ouz-hoc'h,  
 Hirio gand ar fisians-se memez,  
 O Gwerc'hez, Mamm ar gwerc'hezed !  
 E tostann ouz-hoc'h ; ho madelez  
 Am zenn war-zu enn-hoc'h bepred.  
 O hirvoudi dira-z-hoc'h aman,  
 Evel eur pec'her braz ma'z ounn, (\*)  
 Ann hardizieghez a ghemerann  
 Da c'houlenn dre-z-hoc'h ar pardoun ;  
 Pa'z oc'h gwir Vamm ma Salver divin,  
 Na zisprizit ket ma c'homzou ;  
 Mès trugarezuz klevit ouz-in,  
 Plijit rei d'in ma goulennou.

(\*) 'Vel eur bec'herez vraz.

## PEDENNIK D'AR VERC'HEZ.

Ton : *Je viens à vous.*

Gwerc'hez Vari, Rouanez ann Envou,  
 Mamm d'hor Salver ha Mamm d'ann gharistenien,  
 Plijit gan-hoc'h selaou ar pedennou  
 A reomp d'hoc'h (*bis*) ni holl ho servicherien (*bis*).  
 O Mamm dener, ô Mamm drugarezuz,  
 Hon diwallit euz a bep pec'het marvel ;  
 Hor mirit holl a varo hirvouduz ;  
 Enn ho tivrec'h (*bis*) eo e fell d'e-omp mervel (*bis*).

## MEMEZ TRA.

Ton : *Sainte Vierge, Reine des Cieux.*

Gwerc'hez, diwar ho tron enn ed,  
 Grit war-n-on eur sell a druez ;  
 Chelaouit ouz ma feden breman,  
 O Mamm ar gwellan. (*bis*)  
 Obtenit d'in karout Jezuz,  
 Ha war he lerc'h heuil ar vertuz,  
 Grit ma vinn d'e zhan ha d'hoc'h fidel,  
 O ma Mamm santel ! (*bis*)  
 Enn heur ar maro, me ho ped,  
 Ouz a Satan ma diwallet ;  
 Deut c'houi da zeri ma daoulagad,  
 O Mamm dous ha mad ! (*bis*)

**MEMEZ TRA.**

Ton : *Me hoc'h ador ma Jesus.*

Santez Mari, Mamm Doue, e peb amzer Gwerc'hez,  
Jezuz a zo ma Roue, ha c'houi ma Rouanez :  
Evel ma'z eo ma barnier, bezit ma fatronez,  
Hag eyid-on diraz-lian bezit advokadéz.

Hed ma buez em œuvrou ma zikourit hepred,  
Dreist pep tra war va maro n'am abandounit ket,  
Dre ho taouarn d'am Salver prezantit ma ene  
Sûr ez inn d'ar baradoz, dre ho sikour goude.

Me a laka ma fisiñs,  
Gwerc'hez enn ho sicour,  
Accordit d'in assistans,  
Eneb ann adversour :

Pa zeui ma heur diveza,  
M'ho ped, Mamm a druez,  
Obtenit d'in da veza  
Enn env gant ann Elez.

**MEMEZ TRA.**

Ton anavezet.

Mari, Gwerc'hez gallouduz,  
Mamm dous ha Mamm dener,

C'houi zo hepred truezuz  
E-kenver ar pec'her,  
Kendrec'lit enebourien  
Hon encoù,  
Dreist bep tra deul d'hon difenti  
War hor maro.

Enor d'hoc'h, Salver ar bed,  
Gloar d'hoc'h ha meuleudi,  
C'houi pelhini zo ganet  
Gand ar Werc'hez Vari;  
Gloar d'ann Tad, gloar d'hoc'h ive  
Spered-Santel :

D'ann tri Ferson enn Doue  
Gloar eternel.

**MARI D'AR PEC'HER.**

Ton : *Reviens, pêcheur...*

Pec'her dallet gant follenteziou ar bed,  
Siouaz! aboc kement a vloaveziou,  
Sonj eo war bord ann ifern ez oud kousket  
Ha war da benn savet falc'h ar maro.

*Diskan.*

Gwerc'hez Vari, gwir Vamm da Salver ar bed  
Ma Mamm ive, daoust d'am holl bec'hejou  
Peghen dallet! peghen ingrat ounn-me bet!  
Mès chenj a rinn : sellit ouz ma daerou.

Peghellies koleret dre da grimou,  
 Born da Zoue a ie d'az punissa,  
 Hag ann ifern, gant he dan, he dourmanchou  
 Da zigheri evit dont d'az lounka.  
 Me am euz bet distroet taol he goler;  
 Me, evid-oud bepred Mamm a druez,  
 Digant Jezuz em euz goulcunnet amzer;  
 Berr a vezo, chenj buan a vuez.  
 Pec'her, ma map, distro eta ouz Doue;  
 Na gavi ket ar peoc'h pell diout-han;  
 Lezet e t'euz eunn Tad leun a garantez  
 Evit plega d'ann tyrand ar rustan.  
 Goad eunn Doue a zo bet priz ann ene  
 A rez evid eur blijadur mezuz;  
 Fe a goust d'in muioc'h evit ma buez;  
 Koustet e t'euz d'in-me buez Jezuz!  
 E leac'h respount d'am holl deneridighez,  
 Na rez bemde nemet krimou neve;  
 Ha rezolvat ez outd eta da james  
 D'am Map ha d'in da zinac'h da ene?  
 Chetu digor ma divrec'h, prest d'az recco,  
 C'hoaz e zo plaç evid-oud em c'halon:  
 Goulenn eta pardon euz da bec'hejo,  
 Hag evid-oud me am bezò pardon.

ENN ENOR D'AR WERC'HEZ.

Ton : *O filii et filiae.*

*Diskan.*

Bemdez, bemnoz hag e bep li  
 Meulomp Mari.

Peghen kaer eo ar c'hanticou.

Peghen euruz (\*) ar parrresiou

Pa lavar holl ar c'halonou :

Meulomp Mari.

(\*) (Christenien, deut d'ann ilizou,

Heman eo miz ar c'hanticou,

Klevet a rer enn holl broiou :

Meulomp Mari.)

Plijit gan-hoc'h, Sent hag Ele

Unani ho mouéz gant hor re,

Hor e'han a ve kaeroc'h neuza

Meulomp Mari.

Ni zo da Vari consacret,

Da Vari ni vezo bepred;

Canomp eta gant joausded :

Meulomp Mari.

Calz a zoug respet da Vari

Ha calz ho deuz fisians enn-hi;

Aman ann holl a zo d'ezhi :

Meulomp Mari.

Hirie Rouanez ann Envou,

Plijit dighemer hor vœuou,

Ni a ro d'hoc'h hor c'halonou :

Meulomp Mari.

(\*) Retrejou.

(\*) E'mis maë.

Mari, war ann Elez rénet,  
Ann anaoun a boan tennet,  
Torrit holl nerz ann droug-spered :  
Meulomp Mari.

Mari, refuje peb mare,  
Mamm dous bepred d'ho bugale  
C'houi hor e'hunduo da Zoue :  
Meulomp Mari.

Mari, n'hellomp obten pardon,  
Na trec'hi ann dentation,  
Nemet dre ho protection :  
Meulomp Mari.

Hep Mari ne ver ket salvet,  
Gant Mari ne ver ket collet ;  
Mari, ni a vo d'hoc'h bepred :  
Meulomp Mari.

Chelaouit, Mari: hor peden,  
Hed hor buez deut d'hon difenn,  
Deut war hor maro-d'hor souten :  
Meulomp Mari.

Mari pa'z oc'h ken gallouduz,  
Bezit ive trugarezuz ;  
Hon frezantit d'ho Map Jezuz :  
Meulomp Mari.

Grit ma vezo justis Doue  
Dous e-kenver ho bugale ;  
Grit ma'z imp da gana enn eé :  
Meulomp Mari.

### CANTIK S. CASIMIR, ROUE.

Ton : *De Marie qu'on public.*

O ma ene, kanomp bemdez  
Da Vari meuleudiou ;  
Hec'h oberou, hec'h holl buez  
A zo leun a vuzudou.

*Diskan.*

Gloar da Vari  
Ha meuleudi :  
Pebez burzud evuruz !  
Mari Gwerc'hez  
Ha Mamm ivez,  
Gwerc'hez ha Mamm da Jezuz !

Téod ann den a zo gwal dister  
Evit komz euz a Vari ;  
Mès he e'halon a zo téner,  
Holl ec'h hellomp he meuli.

Euz Mari ann Iliz Santel  
A denn gloar ha sklerijen,  
Hag he buez celestiel,  
A zo-skouer ar Christenien.

Mari lavar d'he bugale :  
Sentit, sentit ouz Jezuz ;  
Karit-hen enn hoc'h holl bue,  
Hag ho rento evuruz.

Kalonou chifuz, glac'haret,  
Deut da gavout ar Werc'hez ;  
Gant Mari e ver konfortet  
E pep seurt poan hag enkreuz.

Roit, pec'her, roit a wir galoun  
Peden, enor da Vari ;  
Evit kaout graç ha pardoun,  
Likit ho fisians enn-hi.

Ene devot, pedit Mari,  
Hi eo Mamm ann holl graçou ;  
He c'harout hag he serviji  
Eo kemer hent ann Envou.

O Mari, gwir Vamm da Jezuz,  
Grit m'ann-bezo graç Doue ;

Ouz ar pec'het, Mamm druezuz,  
M'ho ped, mirit ma ene.

Ma chelaouit, grit ma goulenn,  
Paréit ma gouliou;  
Roit d'in enn ho kraçou loden,  
Ha peurz enn ho vertuziou :

Chast ha modest, dous a galon,  
Sobr ha fidel da Zoue,  
Fur em spéret, em e' homz gwirion,  
Ra vezinn e peb mare.

Bezit sikour ar Ghristenien,  
Hag ar peoc'h d'ezho renlit;  
Ouz a bep droug, a bep anken  
Hon c'halonou diwallit.

Evid-omp holl pedit Jezuz,  
Pedit, Mamm a drugare;  
Finvez ar bed a vo spontuz,  
Difennit ho pugale.

Ar re a zeu, e gwirionez,  
War ann douar d'ho pedi,  
Grit ma'z int holl gant ann Elez  
D'ar baradoz d'ho meuli.

Da Jezuz, ar Map Eternel.  
Enn amzer Map da Vari,  
D'ann Tad ha d'ar Spered-Santel  
Gloar, enor ha meuleudi.

**CANTIK ZANT JOSEPH.**

Ton : Santez Mari... pe : Nljit, El mad...; pe :  
C'est le mois de Marie.

Sant Joseph, pried Mari,  
Tad magher da Jezuz,

Ni fell d'e-omp hoc'h enori  
Patroun karantezuz.

DISKAN. { Sant Joseph, pried Mari,  
Tad magher da Jezuz.  
Ni fell d'e-omp hoc'h enori,  
Patroun karantezuz.

Mirer choazet gant Doue  
D'he Vap ha d'ar Werc'hez,  
Bet hoc'h euz enn ho pue,  
Anken ha levonez.

Evit dighemer Jezuz  
N'hoc'h euz na tan, na ti;  
Ho kalon zo-evuruz  
O tont d'Hen adori.

Pa glask Herodez Jezuz,  
D'Hen lakat d'ar maro,  
Gant pebez feiz burzuduz  
Hen kassit da bell-bro!

Pebez poan l'epad tri déz  
Jezuz a zo kollet;  
Goude pebez levenez!  
Jezuz hoc'h euz kavet.

Ho labour en deuz maghet,  
Ho Krouer, Map Doue;  
Enn he labour Mestr ar bed  
Ouz hoc'h-h-lia a zenté.

War ann douar trubuillet,  
C'hoi brema enn Envou  
A zo gallouduz meurhed,  
Roit d'in ma goulennou.

Jezuz a bleg d'he peden  
 Hag he Vamm, ho pried;  
 Eur c'braç an euz da c'houlenn,  
 Eur c'braç d'in goulnennet.

Pa vinn galvet gant Doue,  
*Patroun ar maro mad,*  
 Deut, gand eunn doarn a drue  
 Serrit ma daoulagad.

Tost d'hoc'h ha tost da Vari  
 E kichen trôn Jezuz,  
 Ra 'z inn enn env d'ho moul,  
 Ma Fatroun evuruz!

### BREURIEZ AR FEIZ.

Ton : *Santez Mari, Mam Doue...*; pe : *Ton Kelven.*

*Tud ar Broiou-pell o c'houlenn sikour  
 Breuriez ar Feiz.*

C'houi pere so christenien,  
 Ha na glevit-hu ket  
 Eur c'hri zo leun a anken  
 Euz pevar c'horn ar bed :  
 « Selaouit holl hor peden,  
 « Hor elemihou truezuz,  
 « Selaouit petra c'houlenn  
 « Ho preudeur malheuruz.

*DISKAN, ha respount Breiziz.*

Breudeur, mi glev ho elemmou  
 Euz ann tu-all d'ar mor;  
 D'ho mouez ha d'hoc'h ezommou  
 Hor c'haloun so digor,  
 Ni a roio aluzen  
 Evit sikour ho pro,  
 Ni a zavo bseien  
 Ha d'hoc'h ni ho c'hasso.

Christenien a Vreiz-Izel,  
 He pet truez ouz-omp,  
 Ar joanded eternel,  
 Ann Env a c'houlennomp;  
 Rak ni so war ann douar  
 Tud paour hag emzivad,  
 N'anavezomp, c'houi her goar,  
 Na Jezuz; nag he Dad.

Gweach-all, pell ouz sklerijen  
 Pell ouz lezen Doue,  
 Er menez tevalijen  
 Ho pro a oa ive;  
 Mil bennoz d'ann ebestel  
 Ho deuz ho kelennet;  
 Grit kemend-all, tud fide.  
 Breman enn hion andreid.

C'houi breman zo evuruz  
 P'oc'h euz ar sklerijen  
 Euz ar feiz ker priciuz,  
 — Ho pro a zo christen —  
 Hag ar sklerijen gaer-ze  
 N'oufe disparissa,  
 Mar deuit dre ar garante  
 Enn ho touez d'he maga.

Ma'n deuz Jezuz promettet  
 Ne ancounac ho ket  
 Eur werennad dour roet  
 D'ho preur enn he zec'het,  
 Petra dalvo, christenien,  
 Ar gwennek bennighet  
 Gant p'hini da virviken  
 Eneou vo prenet!

Ah! Doue da rei kalon,  
 Nerz d'ar Missionner,  
 Joa ha consolation  
 Enn he boan ha mizer.

D'hoec'h ive bennoz Doue,  
 D'hoc'h-hu holl, christenien,  
 A roi gant gwir volente  
 Ho kwennek d'her souten!

Deut eta, belek iaouank',  
 Kuitait bro, mamm ha tad,  
 Daoust d'ann daerou puilh ha stank  
 A skuil ho taoulagad :  
 Deut, *Saéou-du Breiz-Izel*,  
 Hast hon euz d'ho klevet  
 O prezeg ann aviel  
 E bro ar balaned.

E' fleuren ho iaouankiz  
 Kals aman renk mervel,  
 Mès ho ene a c'houniz  
 Ar vuez eternal;  
 Roudou ho zreid bennighet  
 Chom merket enn hon bro :  
 Ra zeuio c'hoaz bretoned,  
 Kalz c'hoaz henvel out-ho!

Tud fidel, a wir galon,  
 O welet ho loaniou,  
 Sikourit hor mission,  
 Savit d'e-omp ilizour,  
 Digassit ar skôl ghristen  
 D'e-omp ha d'hor bugale :  
 Ni bedo evit goulena  
 War-n-hoc'h bennoz Doue.

Ha c'houi, Eskop bennighet, (8)  
 Ganet e Breiz-Izel,  
 Gand ar maro diskaret  
 E-kreiz ar broiou-pell,  
 Euz ar baradoz pedit  
 Evit Breuriez ar Feiz.

(8) Ann Aotrou-Pellerin, ghinidik euz a Ghemper.

Digant Mari goulennit  
 Ma kresko c'hoaz e Breiz.

BUGALE AR BROIOU-PELL DA VUGALE VREIZ.

Ton : Edoua c'hoaz da c'hene!

Selaouit ac'hanomp,  
 C'houi-bugaligou ghristen;  
 Ho pet truez ouz-omp.  
 Ha roit d'e-omp ann aluzen :  
 Ann Ee d'hoc'h-hu digor,  
 A zo serret evid-omp;  
 Digorit d'e-omp ann or,  
 Sellit a d'ruéz-ouz omp.

DISKAN.

Deut d'en em gonsoli,  
 Bugaligou dilezet,  
 N'hellomp ho refusi,  
 Hor c'halon so gounezet :  
 Bep miz vo gwenneien  
 Dastumet er barrez-ma,  
 Casset d'ho peleien,  
 Evit gallout ho prena.

C'houi gant eur vamm dener,  
 Euz a hep tra pourveet :  
 Nemet poaniou dister  
 N'hoc'h euz betek hen souffret :  
 Ni paourkez bugale,  
 Gant hor mammou dinatur,  
 D'ar mœc'h, d'al loened goue  
 A zo taolet da vezur.

Pa zeui d'hoc'h ar maro,  
 Gant Jezuz dighemeret,  
 Gant ar Sent c'houi ganô  
 He veuleidiou bepred :  
 Goude m'hon euz souffret

Kement-se enn hon buez,  
Grit na vo' ket serret  
D'e-omp ann Envou da james.

Eunn aluzen dister,  
Digan-hoc'h hu bugale,  
A raf fin d'hor miser,  
A zigoro d'e-omp ann Eo :  
Digassit beleien,  
Beleien d'hor badeza,  
D'hon renta christenien :  
Ra zeui Doue d'ho pañal

Eur gwenneghik bep miz  
A zo eunn diouer bihan ;  
He calon a ve criz  
Ma vefe bouzar d'hor poan :  
Eur guennek, ma bughel,  
Evit prena eunn enel  
Eunn-ene immortel :  
He pet sonj a ghement-sel

Roit ha na scuizit ket,  
Sonjit ez omp ho preudeur ;  
Du pe ven ne ra ket,  
Hon tennit euz hor malheur ;  
P'e gwir evit ann holl  
Goad Jezuz zo bel scuillet  
Mirit na'z aimp da goll,  
Ni, gant-han iye prenet.

Roit, tadha mamm ghristen,  
Dre zacuarnho pugale,  
Ha war hoc'h aluzen  
E couezo bennoz Doue :  
Dre ho madoberou  
Recevet er Barados.  
Ni holl etedigou  
A vezo ouz ho cortoz.

## CANTIK AR PAP HAG ANN ILIZ

Ton : *Chelaouet gant spont hag eston*, pe : *Dom  
Henry II.* pe : *Deut, me ho peñ, Spered Santel*,...

### DISKAN :

- Ar Pap e Breiz a zo karet,
- « Breiz gant ar Pap so bennighet ;
- « A greiz kalon gant hor peden »
- « Ni roi d'ar Pap hon aluzen. »

Jesus, abarz kuitat ar bed  
En deuz bet he Iliz savet ;  
Pobl ha famill ann dud fidel,  
A gherz d'ar vuez eternal.

Eur bar greffet enn eur wezent  
Frouez blazet-mad a-hell doughen ;  
Buez ar c'hristen so greffet  
War Jesus-Christ, Salver ar bed.

D'ar c'horv eunn-ene so krouet  
Da rei d'e-omp buez ha ghened ;  
Ann Iliz e deuz vid ene  
Ar Spered-Santel, gwir Doue.

D'ann oll e ro nerz, sferijen,  
Evit beva gwir ghristenien :  
D'ar Veleien, d'ar Bastored  
Pebez galloud all so roet !

Penn ann Iliz, er baradoz,  
Eo Jesus-Christ, ouz hon gortoz ;  
Da benn Iliz er bed-mañ  
Simon a oa laket gant-han.

Per eo bet evit-se hanvet,  
Ha war Ber ann Iliz savet :  
Ar roc'h so trec'h d'ar gwaghennou  
Per a vo trec'h d'ann iferniou.

Ar Pap a zo e-lec'h San-Per,  
Evel-t-han vikel hor Salver ;  
San-Per oa penn ann Ebestel,  
Ar Pap penn ann Eskeb fidel.

Enor braz d'ar Pap a zouger,  
D'he dreid e stouer, e poker ;  
Gant ar Pap ann oll so reizet,  
Pastored kerkouls ha denved.

Ar Pap a ro da bep Iliz  
Eur gwir Escop, hervez ar reiz,  
Ar re n'en defe ket kasset  
Na vent nemet falz Pastored.

Ar Pap hepken a dle disk  
Petra da ober, da gredi ;  
Hen eo ar barnier war ar Feiz,  
Ha kement a vaa a zo reiz.

Pa gomz ar Pap ouz ann Iliz,  
Plegomp hor pennoù, ma Broiz ;  
Ar pezh en deuz bet diskleriet  
So comz Doue, ne fazi ket.

Ouz-penn ar Pap a zo roue,  
N'en deuz ken mestr nemet Doue ;  
N'hell beza didan lezen den  
Ann neb a ra d'ann oll lezen.

D'ar Person eunn ti er barrez,  
D'ar Pap er bed eur rouantelez ;  
Bro-Rom a zo douar San-Pêr,  
Eno pep christen so er gher.

Tud, ann ifern eunn ho ene,  
A glask na ve ar Pap roue ;  
Mès roc'h ann Iliz so kalet  
Nep stok out-hi so bruznet.

Evit hor prena Map Doue  
En deuz roet goad ha bue ;  
Evit he Iliz, he difenn,  
E' kaver ivez goad christen.

Eur sell hepken, na welit ket  
 Ann dud-ze da Rom diredet,  
 Prest da rei ho goad, ho bue,  
 Evit ar Pap, evit Doue!

Enor eta d'ar *Zouaved*  
 Tud a galon, mar so er bed;  
 Ar maro a hell ho diskar,  
 Doue ho sav da vont d'ar gloar.

Mil bennoz d'ar familou-ze  
 A ro d'ar Pap ho bugale!  
 Bennoz d'ann nep ro he *xiner*  
 Da Jesus, d'ar Pap, da San-Per!

Imprimatur et cantetur.

Corisopiti, die 19 Febr. 1868.

E. EVRARD,

Vic. Gen.

Non bennoz d'ann hini ann eus great ar chantik  
 kaer-man, ha da gement-hini hen kan6.

† AOGUSTIN,

Eskop Sant-Briek, ha Landreger.

(PROPRIETE)

Tréguier. — A. LE FLEU, Imp-Lib.

**CATEK&Z**  
**EVID-AR VUGALE VIAN.**

1. Hag hen zo eunn Doue? Ia. — Krouer ann env  
 hag an douar? Ia. — Doue en deuz ho krouet? Ia.  
 — Doue a zo eur spered? Ia. — N'en deuz ket a  
 gorf? Nan. — Na welomp ket Doue? Nan. — Hon  
 daoulagad a zo re c'hroz? Ia. — Daoulagad groz  
 n'hellont ket gwelet ann traou re fin? Nan. —  
 Doue a wel ac'hanomp? Ia. — Doue a gleo ac'ha-  
 nomp? Ia. — Doue a zo dre holl? Ia.

2. Ha n'euz ket ouz-penn eunn Doue? Nan. —  
 N'euz ket seiz? Nan. — Pemp? Nan. — Tri? Nan.  
 — N'euz nemet eunn Doue hepken? Nan.

3. Hag hen eo tri Ferson e Doue? Ia. — Ann Tad?  
 Ia. — Ar Map? Ia. — Hag ar Spered-Santel? Ia.  
 — Ann Tad so Doue? Ia. — Ar Mab so Doue? Ia.  
 — Ar Spered-Santel so Doue? Ia. — Ha kouskoude  
 n'euz ket tri Doue? Nan. — Na reont ho zri nemet  
 eunn Doue hebken? Nan. — Eunn Doue e tri Fer-  
 son? Ia. — Eur Myster eo kement-se? Ia. —  
 Myster ann Dreindet? Ia.

4. Hag ar Mab eo en deuz en em c'hreat den?  
 Ia. — Hag a hanver J.-C.? Ia. — A zo Map d'ar  
 Werc'hez Vari? Ia. — A zo maro evid-omp? Ia. —  
 War ar groaz? Ia. — D'ar sul? Nan. — D'ar gwener?  
 Ia. — Da Wener ar groaz? Ia. — Ne ket chomet  
 maro? Nan. — Ressuscitet eo? Ia. — Tri deiz

goude? Ia. — Da sul Fask? Ia. — Goude ez eo pignet enn envou? Ia. — C'hoaz e tevio var an douar? Ia. — Da fin ar bed? Ia. — Evit barn ar re veo hag re varo? Ia. — Neuze e ressuscitô ivez ar e'horfou? Ia.

5. Ann dud vad hag hi a ielo d'ar baradoz? Ia. — Hag ar re fall d'ann isfern? Ia. — Hag awalc'h eo mervel gand eur pec'het marvel hepken evit mont d'an isfern? Ia. — Tàn a zo enn isfern? Ia. — Doue he-unan en deuz lavaret d'omp ez euz eunn isfern? Ia. — J.-C., Map Doue? Ia. — Enn Avel? Ia. — Bete pemzek gueache komz ann Avel euz ann isfern? Ia. — Na fell ket d'hoc'h mont d'ann isfern? Nan. — Nag ho mamm? . . . etc.

6. Keit ha ma ye beo ann den, hag hen a hell e'hoaz beza pardounet euz he bec'hejou? Ia. — Evit-se ez eer da govez? Ia. — Hag a renker neuze ansao ann holl bec'hejou marvel? Ia. — Ha kaout keuz anezho? Ia. — Ha beza troet da chenj? Ia. — Hag e ye neuze mad ann absolyen? Ia. — Ha metcet ar galon? Ia. — Ha chenchet liou d'ezhi? Ia.

7. Ha chomet eo e'hoaz J.-C. gan-e-omp war ann douar? Ia. — Corf, goad, ene ha divinite? Ia. — Enn iliz? Ia. — Er gador-govizion? Nan. — Enn tabernacl? Ia. — Enn hostif sakr? Ia. — Kuzet enô? Ia. — Didan speçou (gwiskamant) ar bara? Ia. — Lekeet enô gand ar belek? Ia. — Er gousperou? Nan. — Enn oferen? Ia. — E-kreiz ann oferen? Ia. — Pa bleg ann dud ho fen? Ia.

8. Hag hen zo red adori ha pedi Doue? Ia. — Ha mont d'ann oferen d'ar sul? Ia. — Ha senti ouz hon tad hag hor mamm? Ia. — Ha mont da govez da nebeuta eur weach ar bloaz? Ia. — Ha communia da Bask? Ia. — Ha karout ann holl? Ia. — Pa ve ar vugale enn oad da bec'hi eo e tleer ho c'has da govez? Ia. — War-drô seiz vloaz da nebeuta? Ia. — Ha ne ket mad touet Doue? Nan. — Labourat d'ar sul? Nan. — Laza, skei pe ober poan? Nan. — Ober traoù vil ha mezuz? Nan. — Laérez pe ober gaou? Nan. — Laret ghevier? Nan. — Dibri kig er c'horaz? Nan. — Na da wener ha sadorn? Nan. — Mes pa ve savet al lezen ec'h heller dibri kig enn deziou-se? Ia. — Neuze n'euz ket a bec'het? Nan.

9. Ha n'liell ket ann den en em virout ouz peb pec'het dre he nerz he-unan? Nan. — Sikour Doue a zo red? Ia. — Roët a ve da neb hen goulenn? Ia. — Dre ar bēden e vez goulennet? Ia. — Red eo eta pidi? Ia. — Da vintin ha d'ann noz? Ia. — Ha pa zeu eunn dentaffon bennak? Ia. — Mad eo lavaret neuze : *Jezuz ha Mari, ma sikourit?* Ia. — Evel ma krōg eur c'hrouadur e dorn he vamm pa zeu eunn taol avel grê? Ia. — Ha Doue a ro nerz? Ia.

10. Hag hen zo eur voyen all necesser evit kaout sikour ha graç Doue? Ia. — Ar Sacramanchou Ia. — Seiz sacramant so? Ia. — Ar Vadisiant? Ia. — Ar Confirmation? Ar Binijen? Sacramand ann Aoter? Ann Nouen? Ann Urz hag ar Briedelez? Ia. — Ar Vadisiant hoc'h euz recevel? Ia. — Sacramand ar

Bijnien a vez roët pa'z eer da govez? Ia. — Ha Sacramand ann Aster er Gommunion? Ia. — Ha Sacramand ann Urz d'ar veleien? Ia. — Ha Sacramand ar Briedelez d'ar re a vé o timézi? Ia. — Ha Sacramand ar Confirmation pa zeu ann Aotrou'n Escop evit-se? Ia.

44. Ha Doue eo en deuz great ar religion? Ia. — Hag en deuz karghed an Iliz da esplika d'e-omp he gomzou hag he lezen Ia. — Ha ne hell ket an Iliz en em droumpla var ghemment-se? Nan. — Ar Spered-Santel a ro d'ezhi sklerijen? Ia. — Sér omp ouz he chilaou d'arruout er baradoz? Ia. — Ann Iliz a zo famill ar Ghristenien? Ia. — J.-C. eo ar penn kenta euz ar famill-se? Ia. — Ar Pab a zalc'h he blaç war ann douar? Ia. — Ar Pab a vel skler war ar religion? Ia. — Skleroc'h evid holl doktored ar bed? Ia. — Ar Pab, war ar religion, a zo doktor ar baradoz? Ia. — An Eskibien a zeu goude? Ia. — Red eo senti ouz ann Iliz? Ia. — Ni holl a zo bugale da Zoue ha d'ann Iliz? Ia. — Hag heritourien d'ar baradoz? Ia. — Goude hemennou Doue ha re ann Iliz eo guir hent ar baradoz? Ia. — Kaer eo beza er baradoz? Ia. — C'hoant hoc'h euz da vont d'ar baradoz? Ia.

Ce petit Livre breton intitulé : *Catekiz evid ar vugale nian*, pouvant être très-utile, nous permettons de l'imprimer.

A Quimper, le 21 janvier 1855.

SAUVEUR, vic. gén.

## TAOLEN.

Adoromp holl e sacramant ann Aoter. . . . .	5
Allaz! na oufe den compren. . . . .	30
Ama pell euz ann trouz. . . . .	34
A vianig am euz pec'hiet. . . . .	41
Chelaouit, ma Jezuz, chelaouit ouz. . . . .	43
Chetu ama eur reolen. . . . .	34
Christenien, pobl euzuz. . . . .	6
C'houi pere zo christenien. . . . .	54
Deut holl, ha deut gant fe. . . . .	22
Doue en deveuz ma c'hrouet. . . . .	6
Doue, gwir bried. . . . .	45
Elez euz ar baradoz. . . . .	29
En em roit d'ar joa, ô Gwerc'hez. . . . .	36
Eunn arc'hel aberz ann Aotrou. . . . .	35
Eunn dezir braz am euz. . . . .	24
Gwerc'hez, divar ho trôn enn ee. . . . .	45
Gwerc'hez Vari, a c'hrac karghet. . . . .	40
Gwerc'hez Vari, Rouanez ann evou. . . . .	45
Jezuz, peghen braz ve. . . . .	16
Mari, Gwerc'hez gallouduz. . . . .	4
Me gred fern hep doutans e-bed. . . . .	48
Me ho salud, korf ma Salver. . . . .	4
Meulomp holl da james, Jezuz hag. . . . .	23
Meulomp holl... Doue leun a vadelez. . . . .	26

Ni ho salud, streden. vor. . . . .	41
Ni ho salud, Rouanez-amm Etez. . . . .	42
O kalon sakr-euz ma Jezuz. . . . .	27
O Gwerchez-Vari, leun a' druc. . . . .	48
O ma ene, kanomp beñdez. . . . .	50
O ma Jezuz, chetu deñt-amm amzer. . . . .	4
Pec'her-dallet gant-follenteziou ar bed. . . . .	47
Peglien-kaer-co ar e'hanticou. . . . .	49
Santez-Mari, Mamm-Doue. . . . .	46
Sant-Jozeph, pried-Mari. . . . .	52
Selaouit-a-e'hanomp. . . . .	57
Sonjomp-e-gwirionez. . . . .	14
Spered-Santel, Spered. . . . .	3

---

<i>Parce Domine.</i> . . . . .	4 — 5
Benediction ar Sacramant. . . . .	5 — 6
Ar pec'het. . . . .	41 — 43
Ar-maro. . . . .	43 — 44
Ar-finvezou-diveza. . . . .	14 — 15
Ar-baradoz. . . . .	16 — 18
Ar-gommunion. . . . .	18 — 24
Ar-purgator. . . . .	30 — 31
Al-labouërer-devot. . . . .	34 — 33
Ar-Werc'hez. . . . .	35 — 52
Ar-Rozera. . . . .	37 — 40
Breueriez ar-feiz. . . . .	54 — 57